

YF_0117_Pa 'z on deuet, deuet on

Er meneier me am-boà klevet ar gaoz
E vije kalz tud d'ar fest-noz.

Pa 'z on deuet, deuet on
Mad e gavan, 'giz a lavaran
Pa 'z on deuet, deuet on
Mad e gavan, chomet on

Ha da zansal am-boà klevet
Oa re ar merc'hed d'ar baotred

Sellomp breman an danserien
Dansal a reont, c'hoarin a reont o 'fenn

Sellomp breman ouzh ar merc'hed
Dansal brav-brav hep muioc'h abeg

Paotred, paotred na fachit ket
Gwir eo ar pezh a oa lavaret

Ha c'hwi merc'hed dalc'hit d'ho tro
Ma n'ho-po ket ar maout c'hwi ho-po ar c'hog